

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 75. RUMADELLIK GUE

( E korn dehoù ar fol-  
enn e lenner : Great  
gant n'oun ket piou. )

1. Eunn ozac'h euz ar guer-ma )  
a zo eat da bardona ) bis  
da zantez Anna Vened  
da bedi Doue ma varvo he c'hreg  
ann aillon! ann aillon !

2. Pa deuz d'ar gear a bardona  
edo he c'hreg ho tibuna  
Itron Varia 'druez  
ak ato 'maout e buez  
aillonez! aillonez!

3. Itron Varia 'r c'hraz  
peseurt mall ac'h euz d'am c'haz  
brasa mall ac'h euz d'am c'has  
eo da gaout eunn all em plas  
mil fripon ! mil fripon !

4. Ann ozac'h eunn deiz a oue  
da di ar c'hure a rede;  
- aoutrou kure, me ho ped  
deuit da noui va grek  
no dare, 'zo dare da vervel !

5. Pa zeuz ar c'hure enn ti  
edo'r c'hrek o tijuni  
gant-hi eur skudellad-iod  
daouliardad leaz ribod  
ar bitouil ! ar bitouil !

6. Ann ozac'h eunn deiz a oue  
da di ar c'hloc'heur a rede :  
- aoutrou kloc'heur, me ho ped  
sonnit kaon da va grek  
no dare, 'zo dare da vervel !

7. Sonet kaon, toullet ar bez  
hak ar c'hrac'hik ne varv ket  
hag he goaz d'ar vered  
hep skuil daelou e deus kaset,  
ar c'hrac'hik ! ar c'hrac'hik !

-----